

D'an 2^{eil} a viz Eost

- Er bloaz a c'hras 257, e Roma, da vare heskinadeg Valerianus, **sant Stefan I^{añ}**, pab ha merzher, diuzet e 254 e katakomboù Sant-Kalist ha dibennet eno e-pad an oferenn. Evit ma vefe doujet ouzh unvaniezh ar gristenion gant ar C'hrist degaset dre ar vadeziant ec'h enebas taer ouzh an Afrikaned a gustume badeziñ en-dro an disivouderion a c'houlenne distreiñ d'ar genunaniezh klok gant an Iliz.
- E 371, **sant Euzeb**, eskob Vercelli pe Versell er Piemonte, feizvonnour. Divrall e tifennas sant Atanaz hag e voe forbannet gant an impalaer Constantius evit bezañ embannet dibleg Kredo Nikaia. Goude eizh vloaz en harlu e tistroas d'e sez hag e klaskas lakaat e gloer da ren buhez boutin.
- E 833, e Bro-Saoz, **santez Alfreda** (Etheldreda), penitiourez. Hag hi merc'h Offa, roue Mersia, e oa prometet da sant Ethelberzh a voe drouklazhet p'edo o tont da c'houlenñ he dorn. Neuze en em dennas en ur peniti e-kichen manati Crowland bet savet gant he zad.
- E 1868, e La Mure e-kichen Grenoble, distro da Zoue ene **sant Pêr Juluan Aymard**, beleg kevrinour, abostolour azeulerezh an Eukaristia, diazeour Beleion ha servijerezed ar Sakramant Santel.
- E 1936 e Spagn, **Merzherion gwenvidik Barbastre**, lakaet d'ar marv da-geñver ar brezel keodedel.
Fulub a Jezuz Munarriz Azcona, Juan Diaz Nosti ha Leoñs Pérez Ramos, anezho beleion kiminiaded Kalon Dinamm Mari, bet fuzuilhet gant ar vezinourion, **Zeferin (Ceferino) Giménez Malla, Tsigan** a strivas da gas war-raok ar peoc'h etre e bobl hag e amezeion ; en Hijar, nepell diouzh Teruel, **Francisco Calvo Burillo**, beleg dominigat ; e Madrid, **Francisco Tomaz Serer**, beleg eus Trede-Urzh Sant-Frañsez.
- **Kounidigezh Itron Varia an Aeled** en tiegezh frañsezat pergen. Etre ar I^{añ} da greisteiz hag an 2 betek hanternoz e c'heller gounid hedrugarenn ar Porziúncola anvet *Pardon Asizi*.
Savet e voe nevedan Itron Varia an Aeled gant penitiourion deuet eus Palestina. Dibabet e voe e 576 gant sant Benead evit sevel ur manati stag ouzh hini Subasio. E 1209 e oa rivinet ar chapelig pa voe adsavet gant sant Frañsez, an trede santual bet adsavet gantañ goude dezhañ bezañ klevet ur vouezh e Sant-Damiano o c'hourc'hemenn dezhañ : "*Kae ha sav en-dro va Iliz*".
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Tuniav**, abad, diskibl da sant Samzun e Kembre ha war-lerc'h da sant Meven en abati Gwazel ; manac'h e Sant-Tewiniav, enezadenn eus eskobiezh Dol en hini Sant-Maloù nepell diouzh Sant-Meven.
- War-dro 577, **sant Friazh**, penitiour e Bro-Naoned, ganet e Bezenez e Bro-Roazhon, keneil da sant Segondel ha da sant Felis, eskob Naoned.
- En Devnon (Kernev-Veur), er VI^{vet} kantved, **santez Sidvol**, gwerc'hez ha merzherez.
- En Iwerzhon, **sant Komman**, VI^{vet} kantved manac'h, moarvat un niz da sant Koulmkell.

D'an 3 a viz Eost

- Kounidigezh **Kavidigezh Sant Stefan, Diagon Kentañ ha Merzher Kentañ**. D'an 18 a viz Kerzu 414 en em ziskouezas sant Gamaliel d'ur manac'h anvet Migez evit diskuliañ dezhañ lec'h e sebeliadur e Cafargamala (hiziv Kfar-Gamala e Palestina). Migez a yeas da gaout ar beleg Lukian a reas kleuzañ d'ar Gwener 3 a viz Eost 415 : kavet e voe relegoù sant Gamaliel hag, e-kichen, re sant Abibon e vab, hag ivez re sant Stefan ha sant Nigoudem.

Patrom iliz-veur Sant-Brieg eo Stefan hag eno e veze lidet ent-kanmoedek kavidigezh korf ar proto-merzher.

- War-dro 49, distro da Zoue ene **sant Gamaliel**, diskibl an Arloz.

Hag eñ doazhour eus al Lezenn ha Farizian, e voe kelenner Saoul (kv. Ob. 22,3) a zeuio da vezañ Paol ur wezh gonezet d'ar C'hrist, hag hervez lod, e voe kelenner Barnabaz ha Stefan ivez. Difenn a reas Pêr dirak ar Sanhedrin (kv. Ob 5,34). Badezet e vije bet gant an Ebistel Pêr ha Yann a-gevret gant e eil vab Abdias - Habib pe Abibon, lesanvet Diboan e Breizh - ha Nigoudem a oa diskibl da Jezuz dre guzh. E Breizh e vezer boaz d'o gwelout o zri e derc'hennadurioù ar Sebeliadur. Gamaliel en dije sebeliet korf sant Stefan ar Proto-Merzher en e zomani e Cafargamala (hiziv Kfar-Gamala e Palestina) hag ivez hini Nigoudem a oa bet, eñ ivez, heskinet gant ar Yuzevion. D'e dro e voe sebeliet Gamaliel eno, e-kichen e vad Abdias (Habib pe Abibon).

- Er I^{añ} kantved, **sant Nigoudem**, diskibl an Arloz.

Farizian, un den a bouez anezhañ a oa deuet da atersiñ Jezuz diouzh an noz evit bezañ kelenner gantañ. Gant sant Jozef Arimatea e vije deuet da avielañ e Breizh-Veur hag en dije diazezet Avallon.

- E 437, **sant Dalmas**, abad e Kêrgustentin.

Ofiser e oa e servij Teodoz, impalaer Kêrgustentin, pa zivizas gant asant e wreg mont da vanac'h gant unan eus e vibion sant Faost, e manati e dad speredel sant Isaac. Edo o vevañ eno abaoe 48 bloaz pa'z eas er maez eus ar sklotur gant e genvreudeur evit kemer perzh e senez-meur Efezos e 431, o sevel a-du gant an eskibion reizhvriek a-enep da Nestorius arc'heskob Kêrgustentin.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Trea**, maouez santel a savas un iliz.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Dervill** pe **Dervel**, abad.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Da** (Daigh en Iwerzhoneg), mab Cairill, eskob Inis Caoin, diskibl Ciarán Clúain Mhic Nóis ha keneil sant Koulmkell.

D'ar 4 a viz Eost

- Er I^{añ} kantved, **sant Aristark a dTesalonikêia**, diskibl sant Paol hag e geneil feal e-doug e veajoù hag er c'harc'har e Roma.

- Er I^{añ} kantved, **santez Perpetua**, uheliadez eus Roma bet badezet gant sant Pêr.

Degas a reas d'ar feiz he mab sant Nazer hag he gwaz Africanus. Sebeliañ a reas meur a verzher.

- E 258, **ar sent Justin ha Crescentius**, merzheriet o-daou e Roma.

- E 1859, e Ars en eskobiezh Belley e Bro-Lyons, **sant Yann-Vari Vianney**, beleg, paeron ar bersoned.

A-hed ouzhpenn daou ugent bloaz e Ars e pleustras e waziadezh en un doare marzhus dre lidadenn an oferenn santel, ar brezegerezh, ar bedenn diastal, ar binijenn. Bemdez e katekize ar vugale hag an

oadourion, e tegemere an dud a zeue da c'houell sakramant ar binijenn, o tremen peurliesañ ouzhpenn dek eurvez bemdez er gador kofez.

- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Luan**, abad, diskibl sant Komgall.

D'ar 5 a viz Eost

- **Dedi brientiliz Santez Mari Veur Roma** bet savet war an Eskilin gant ar pab Sikst III, iliz kentañ ar C'hornôg dediet d'ar Werc'hez Vari Mamm Doue, nebeudik goude Gousenez Efezos e 431. Anvet eo ivez ar gouel-mañ "Itron-Varia an Erc'h", en eñvor da vurzhud an erc'h kouezhet e miz Eost e Roma o tresañ dres al lec'h da sevel iliz an Itron-Varia.

- E 642, merzherenti **sant Oswald**, roue Norzumbria.

Mab Ethelfrid e voe harluet en Dal Riada hag eno badezet gant menec'h enez Iona. Diwar e c'houlenn e teuas sant Aezan da sevel manati Lindisfarn. Lazhet e voe gant paganed e kad Masserfeth.

- E 862, **sant Teodorig pe Tieri**, eskob Nemetoc (Arraz) ha Camarac (Cambrai) e-pad ouzhpenn tregont bloaz e voe unan eus eskibion veur e amzer.

- E 751, **sant Avel** (pe **Abel**), Iwerzhonad, abostolour Hannonia (Gl. Hainaut), manac'h e Lobbes, arc'heskob Remens (Reims).

- En Iwerzhon, **santez Duinseach**, maouez santel.

- En Iwerzhon, e 1017, **sant Gormgal**, abad e bro Gaillimh (Galway) war aod kornogel an enezenn.

- E Breizh, d'ar 5 a viz Eost 1620, distro da Zoue ene **Mamm Yoanna an Avielour**, d'he 46 bloaz, leanez karmeziadez e manati Nazared e Gwened, c'hoar an Tad Visant Huby, genidik eus an Henbont.

Goude ur vuhez santel ha skouerius-meurbet ne zegemeras, e-doug tri mizvezh diwezhañ he buhez war an douar, boued ebet estreget an ostiv santel bep eil devezh.

D'ar 6 a viz Eost

- **Gouel Treuzneuziadur an Arloz** o lidañ an deiz ma erzerc'has ar C'hrist, mab karet an Tad, war ar Menez Tabor dirak Pêr, Jakez ha Yann e glod e bezañs Moizez hag Elia o tegas testeni al Lezenn hag ar Brofeded.

- E 304, e Compuntum hiziv Alcala de Hénarès e Bro-Spagn, merzherenti **ar sent Just ha Pastor**, patromed kêrioù Alacal ha Madrid.

Ne oant nemet bugale p'en em ginnigjont int o-unan d'ar verzherenti.

- E 523, e Roma, distro da Zoue ene **sant Hormisdaz**, pab.

Hag eñ un den a beoc'h e teuas a-benn da c'hounid er Reter dibenn disrann Akas hag er C'hornôg e vefe doujet an Iliz gant ar pobloù nevez degouezhet dezhi.

- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Cronan**, abad e bro Dulenn.

D'ar 7 a viz Eost

- War-dro ar bloaz 64, da vare heskinadeg Neron, merzherenti **santez Klaodia**, gwreg sant Pudens. Hervez hengounioù Breizh-Veur e vefe merc'h an impalaer Klaoda ha Plautia, ha bezañ bet advabet gant Karatakos. Dimezet gant ar senedour Pudens e tegemerjont sant Pêr ha sant Paol en o falez a voe anvet *Hospitium Apostolorum* pe *Palatium Britannicum*. War a hañval e voe lakaet d'ar marv a-gevret gant he gwaz da vare heskinadeg Neron, evel ma c'hoarvezas diwezhatoc'h gant o merc'hed santez Prased ha santez Pudensiana, hag gant o mab sant Novatus tra ma voe e vreur sant Timozeos kiminiad e Breizh-Veur.

- E 258, e Roma, merzherenti **sant Sikst II**, pab, hag e geneiled.

Edo o lidañ ar c'hevrioù santel e bered Sant-Kalist, d'ar 6 a viz Eost, pa voe harzet da heul gourc'hemenn an impalaer Valerianus ha dibennet war an taol a-gevret gant pevar ziagon, **Genver, Visant, Magn ha Stefan**. D'an hevelep deiz e voe drouklazhet daou ziagon all, ar sent Agapit ha Felisim, e bered Pretekstad. Ar seizhvet diagon, Loarañs a voe andisheet d'an 10 a viz Eost.

- E 304, en Augsburg e Alemania (Schwabe, Suevia), merzherenti **santez Afra**, merc'h santez Hilaria.

Gouestlet da Wener gant he mamm ha tonket neuze da vezañ gast e veve en he aes pa voe gonezet d'ar feiz ha merzheriet kent resev ar vadeziant.

- War-dro 362, merzherenti **sant Donat**, eskob Arezzo e Toscana.

Ganet en un tiegezh uhelidi roman e voe dibennet da vare heskinadeg Juluan an Diansavour ma oa bet e gendiskibl en e yaouankiz. Kavet e vez e deiziataer Sant-Gall en IX^{vet} kantved.

- War-dro 420, **sant Viktris**, eskob Rotomagos (Rouen), mignon da sant Varzhin, meulet gant Sulpis Sever ha Paolin Nola.

Soudard da vare Juluan an Diansavour e tiwaskas poanioù e-leizh. Kiminiad e Bro-Artez ha Bro-Flañdrez e c'hounezas ar vMorined hag ar Nerviened d'ar feiz.

- War-dro 660, **sant Donat** (pe Duned), eskob Besoncio (Besançon), mab Waldelen, dug Burgondia ha Flavia, filhor sant Koulman Veur, manac'h e Luxovium.

Diazeour manati manac'hezad Sant-Paol e Besoncio e voe ma skrivas evito ur reolenn tennet eus ervedoù ar sent Benead, Koulman ha Sezer.

- E 1547, e Napoli, **sant Gaetan Thiene**, beleg diazeour.

Mab kont Thiene, ganet e Vicenze e Republik Venezia, e teuas da vezañ prelad eus Kuria Roma. Sevel a reas ur gevredigezh liked anvet *Oratorio del Divino Amore*, "Naved ar Garantez Doueel" gant ar pal da liammañ uhelvennad ar vuhez vanac'h gant servij ar vreudeur. Gant e vignon Giovanni Pietro Caraffa, hag a voe pab goude-se dindan anv Paol IV, e tiazegas ur gevredigezh kloer reoliek dezho da bal ren buhez an Ebestel. Anvet e voent an dTeatined diwar anv kêr Chieti, *Theate* e latin, ma voe Carafa an eskob anezhi.

- E 1638, e Gondar en Etiopia, merzherenti **ar wenvidion Kasian a Naoned hag Agatañj a Vendôme** (François Nourry), beleion gabusin, kiminiaded.

D'an 8 a viz Eost

- E 304, e Roma, merzherenti **sant Siriag**, a vez kontet e-touez ar 14 sant skoazeller.. Hag eñ prefed an impalaeriezh e Toscana, e voe gonezet d'ar feiz hag e roas e vadoù d'ar beorion. Urzhiet e voe gant ar pab Marsellin. Karc'hariet war urzh Diocletianus gant e vignoned Largus ha Smaragus, e voe dieubet dre ma skarzhas un diaoul eus merc'h hemañ. Galvet e voe ivez da hec'holiañ merc'h roue Persia hogen o tistreiñ da Roma e voe harzet an tri c'heneil war urzh Maximianus, jahinet kriz ha dibennet en diwezh.

- E 608, distro da Zoue ene **sant Mommol**, abad Fleury war ribl al Liger a dreuzkasas gant kalz azaouez relegoù sant Benead eus Monte-Casino d'e abati.

- D'ar 6 aviz Eost 1221, e Bologna, ganedigezh en neñvoù **sant Dominig**, beleg diazezour. Ganet eo Dominig e rannvro Burgos e Bro-Spagn e 1170, hag e wiskas sae chalonied reoliek Osma. Bez' e voe gwazier uvel ar prezegerezh er broioù trubuilhet gant disivoud an Albiz hag eñ o vevañ er baourentez hag er bedenn diastal. Bodañ a reas un nebeut maouezed e Prouilh dindan ur reolenn a vuhez ha da c'houde e tiazezas e Tolosa Urzh ar Brezegennerion -anvet diwezhatoc'h Dominigaded-, hag int leaned galvet da vevañ diouzh doare an Ebestel, o kestal, o plediñ d' o nesañ dre ar bedenn, ar studi ha gwazerezh ar Gomz.

- E Kernev-Veur, **sant Elid**, eskob.

- En Iwerzhon : **sant Bevan** (Iw. Beóan), eskob ; **santez Daerez** (Iw. Daire), maouez santel ; ha **santez Curcach** - a vefe **Korgeg** e brezhoneg- gwerc'hez.

